

Disul vintin pa oan savet

Me 'zo 'vont da ganañ deoc'h, fardigoudigou tralala
Me 'zo 'vont da ganañ deoc'h ur chañson leun a c'hevier
Ur chañson leun a c'hevier, o gué,
Ur chañson leun a c'hevier

Ha ma'z eus enni ur ger gwir, me 'zlefe koll va buhez
Disul vintin pa oan savet, an dud 'vont d'ar gousperoù
Me 'samm un arad war va skoaz, ha mont d'an aod da arat
E-touezk ar vein hag ar c'herreg, pere ne oant ket kalet
Ha d'an distro ach'ano, me rankontras ur wezenn
Ur wezenn ber, avaloù trenk, hag hi karget a spezad
Ha me 'reiñ un taol bazh dezhi, hag hi a ziskarg mouilc'hi
Klujiri ha kefeleged, hag ar rest all oa merc'hed
Div anezho a oa koant, hag an div all deskamant
An div vravañ a gemeran, hag an div all a lezan
Neuze an div all a lavare, hor c'hasit ganeoc'h ivez
Ur wech all pa zeomp en-dro, neuze ni ho kemero
Benn ur wech all pa zeuoc'h en dro, 'benn neuze ni 'vo maro
Ni vo maro hag enteret, lakaet hor c'horf er vered
Ha war hor bez e vo savet, teir vleunienn eus ar c'haerañ
Unan 'vo ruz, unan 'vo gwenn, hag eben all 'vo violenn.